

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**Lavar din-me 'ta paotr yaouank**

Lavar din me 'ta paotr yaouank, *Rigodo fardifardo*  
Peur e skrivi da embannoù, falarinette, *Rigodo fardifardo falarino*

Na pa vezo e Guisseni  
Aour melen touez an tali

Na pa vezo e Plounéour  
Tout a baotred o evañ dour

Na pa vezo e Kerlouan  
An dibenn iliz o tiwan

Pa vezo e Lanhouarne  
Brevet ar bleiz, kas Sant Herve

Na pa vezo e Lesneven  
Kavet brinik e-touez ar foenn

Na pa vezo e Plabenneg  
Ul litrad gwin 'vit daou wenneg

Na pa vezo e Plouvian  
Kafe ha te da vern-vihan.

Na pa vezo e Grouanneg  
Echu ar gaoz gant ar beleg

Na pa vezo e Plougerne  
Merc'hed mouzhet diouzh ar c'hafe

Na pa vezo e Lilitia  
Tout ar c'hezeg o vrennika

Na pa vezo mui na bagoù  
Na mouklet e pont Treglonou

Na pa vezo barz e Plougin  
Polotrez diouz ar gwez sapin

Na pa vezo barz e Bourc'h-Wenn  
Un tammik berroc'h o lostenn

Na pa vezo e Lokournan  
Ar yar o dansal gant al louarn

Na pa vezo e Gwipronvel  
Dresoc'h he c'hoef gant Gabrielle

Na pa vezo da baotred vras  
Diskroget diouz ar chopinad